

CHANTS PATRIOTIQUES BRETONS  
DU BARDE TALDIR  
(TROISIÈME ÉDITION)  
HARMONISÉS PAR MAURICE DUHAMEL

# KANAOUENNOU TALDIR

*Ton-eila evid Piano pe Telen  
· gant*

MAURICE DUHAMEL

- I. BRO GOZ MA ZADOU (Chant National)  
*Vieux pays de mes fous*  
II. DALC'H SONJ (Évocation du Passé)  
III. ME HO SALUD, TUD A GALON (Chant de Bienvenue)  
IV. SAO BREIZ-IZEL (Chant de Marche)

— SAINT-BRIEUC —  
ÉTABLISSEMENTS GAUDU



AU  
MÉNESTREL BRETON  
— 16, RUE DE ROHAN —

# I. BRO GOZ MA ZADOU

(Kan broadus)

The musical score consists of six staves of music. The top staff is for the voice (KAN) and the piano (PIANO). The lyrics are written below the vocal line. The piano part includes dynamic markings like *f*, *mf*, and *p*. The vocal line has slurs and grace notes. The middle section starts with a piano solo followed by a vocal entry (DISKAN) with dynamic *ff*. The bottom section continues with piano and vocal parts.

**KAN:**

Ledan Ni, Breiziz a galon, ka romp hon gwir  
 Vro! — Bru . det eo an Ar vor dre ar bed tro - dro — Dis . pont 'kreiz ar\_ bre . zel, hon  
 ta . dou ken mad, — A skuil az e . vit . hi o gwad \_\_\_\_\_

**PIANO:**

PENN

**DISKAN:**

O Breiz, ma Bro! me' gar ma Bro Tra ma . vō  
 mor vel mur 'n he zro Ra ve zo di ga bestr, ma Bro!

I.

Ni, Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro,  
 Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro,  
 Dispont kreiz ar brezel hon tadou ken mad  
 A skuillaz evit-hi o gwad !

II.

Breiz, douar ar Sent koz, douar ar Varzed,  
 N'euz bro all a garan kemend 'barz ar bed.  
 Pep menez, pep traonien, d'am c'halon zo kaér,  
 Einné kousk meur a Vreizad téz !

III.

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv :  
 N'euz pobl ken kaloneg a-zindan an nenv.  
 Gwerz trist, són dudius a ziwann eno,  
 O ! Pekaér ec'hout, ma Bro !

IV.

Mar d'eo bet trech'et Breiz er brezeliou braz,  
 He iez a zo bepred ken beo ha biskoaz.  
 He c'halon birvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,  
 Dihunet out bréman, ma Breiz !

## II. DALC'H SONJ, O BREIZ-IZEL

**KAN**

**PEOCHUS**

**TELEN PR PIANO**

Dalc'h sonj, o Breiz-izezel deuz  
an am . zer Rog ma oas gwer . zet ha tre c'het. Pa  
e'hal . le da vi . bien ker . zet se der. Sonn o fenn, di . nec'h  
spe red Rog ma oas bet tao . let, heb di . fenn ha paour Din.dan  
seu liou poun . ner an es . tren Ha sta get da vi ken deuz  
e garonz aour Deuz Eun tam zalc'het da dreid ken te ur eur cha den' Kenta lusk  
Eun tam zalc'het

I  
 Dale'h sonj, o Breiz-Izel, deuz an amzer  
 Rog ma oas gwerzet ha treç'het !  
 Pa c'halle da vibien kerzet seder  
 Sonn o fenn, dinec'h o spered  
 Rog ma oas bet taolet hep difenn ha paour  
 Dindan seuliou pouunner an estren  
 Ha staget da viken deuz e garrons aour  
 Deuz da dreid ken tener eur chaden !

II  
 Dale'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar re-goz  
 O deuz luskellet da gavel !  
 En peb traonien ha war griben peb roz  
 E klevi o mouez en avel.  
 An aveliou a c'houez war da blennennou,  
 A zoug eneou ar Vretoned,  
 Pere lavar d'id bemdeiz en o c'hleñmou :  
 Dale'h sonj euz da amzer dremenet !

III  
 Dale'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar Morvan,  
 Deuz Nominoe, mestr dispar !  
 Deuz da Rouane, deuz ur prinz Alan ;  
 Deuz ar Sent 'deuz gret da zouar ;  
 Deuz an Duked vad a c'houarnaz ar vro,  
 Ha deuz hano an dud-a-vrezel ;  
 Deuz merdealdi ha korserien Sant-Malo  
 A zougaz dre ar bed da vanniel !

Dale'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar Varzed  
 A ganaz da lez dudius !  
 Bennoz d'ezo, da lez zo beo bepred,  
 Beo ar Brezonek enorus !

IV  
 Dale'homp sonj ! Dale'homp da viken an envor  
 Deuz galorion dispar hon c'hetadou,  
 Ha n'enz forz pegeid e padfe Bro Arvor  
 Na zilezomp biken o roudou !

### III. ME HO SALUD, TUD A GALON

**MAN**

**PIANO**

Lusk kerzet

An holl

Unan

a— galon, Fleuren iaouan . kiz ar e'chanton Me ho salud, tud a— galon.

Fleuren iaouan . kiz ar e'chanton Ara e.nor d'ar vro— vreton Hag a zalc'h u hel

An holl Cresc.

ho panniel; Hag a zalc'h u . hel ho pan.niel En des.pet da iud an a . vel!

Cresc

I  
 Me ho salud, tud a galon  
 Fleuren iaouankiz ar e'chanton } bis  
 A ro enor d'ar vro vreton  
 Hag a zalc'h uhel o panniel (bis)  
 En despet da iud an avel !

II  
 En despet d'an avel gwalorn } bis  
 Ni chomo bepred dorn ouz dorn  
 Ha ni welo, deuz a beb korn  
 Tud e leiz o tond d'an arme (bis)  
 'Vid difenn gwiriou ar c'ontre.

III  
 Evid difenn ar Brezonek } bis  
 Ken enorus hag ar Gallek  
 Ar bihana 'vo kalonek  
 Hag an disterra vo nerzus (bis)  
 Rag souza 'drenv a ve mezus.

IV  
 Kement Breton a zo d'emp kar } bis  
 Kement Bretonez zojd'emp c'hoar  
 Ebarz ar vro ma omp holl par,  
 Dre 'n em zikour 'n ell egile (bis)  
 Breiz vo gloriou heb dale !

V  
 Rog echui ma c'hanaouen } bis  
 Chom o ra ganin da c'houlen  
 Ma kresko bemdez ar vanden  
 Euz ar re zo don en o c'ureiz (bis)  
 Gwir garantez evid o Breiz.

# IV. SAO, BREIZ-IZEL

(Kan-bale tud Breiz)

**Lusk kerzel**

**PIANO** **PENN**

**Nerzek ha skoet mat**

Sao, Breiz-Izel, d'an nec'h da vannie lou Ru ziet gant gwad hon c'hen ta dom!

Stagomp d'hongou riz ar c'hezeier hir. Ra vo hon di vrec'h krenv vel dir'

La varomp holl euz a bouez hon penn: Breiz da virvi ken! Breiz da vir vi ken!

An holl

La varomp holl euz a bouez hon penn: Breiz da vir vi ken! Breiz da vir vi ken!

I

Sao, Breiz-Izel, d'an nec'h da vannie lou  
Ru ziet gant gwad hon c'hen dou !  
Stagomp d'hon gouriz ar c'hezeier hir  
Ra vo hon divrec'h krenv vel dir !  
Lavaromp holl euz a bouez hon penn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

II

Dihun Breiz-Izel, ma mam vinniget  
Rag an delz a zo digouezet !  
Hon galv a ziston war benn ar mene  
Hag ac'h entana peb ene :  
Deuz peb parrez Breiziz a ziskenn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

III

O louc'h adennou a red dreuz d'an er  
Bete gweled hon launeler,  
Ar mammou a zigas ho bugale  
Da gaout ho zadou en arme ;  
N'euz med eur louc'h en Breiz penn da benn :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

IV

Mene Bre ro born da Vene Kragou,  
Tridal a ra o c'hibennou :  
Ané o-unan o reier a ruill  
War an enebour kouezont puill ;  
Gwagen ar mor a lar d'ar wagen :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

V

Beteg ar gwelec'hliou ar re bella  
Ar c'horn a vrezel a vouda  
Hag a lär d'an holl boblou euz ar bed  
E ma beo gouenn ar Vretoned !  
An avel mor iud en eur dremen :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !

VI

Kalonou an holl a zo entanet  
Hag an divrec'h a zo nerzet,  
Paotred Breiz Vilhan ha Breiziz Tramor  
A skoulm o douarn dreist ar mor !  
Holl Ch'alloudek, ro'n Trec'h d'az milbien :  
Breiz da virviken ! Breiz da virviken !